

## Ar soner hag ar bleiz

Da heul eun tamm fest-noz, Erwanig ar soner  
A laras kent mond kuit da Laou, e gomper :  
– "Eet on ma mignon, kenavo ar henta !  
Gwell 'ganin mond d'ar gêr evid chom da ruza."  
Hag eñ ha mond buan, mall warnañ, 'dreuz d'ar hoad  
Rag an erh oh ober hag an noz o tostaad.  
Teñval sah oa er-mêz ha ne weled takenn,  
Ken e kouezas prestig en eun toull war e benn.  
– « Aiou ma buhez, 'ple' an diaoul 'on koue'et ?  
Ba' toull ar bleiz mar'ad hag eñ oh ma zelled. »  
'Oa ket brao e jeu, anad eo deoh, ma den !  
Ober a ree e zoñj prim-ha-prim, en eun tenn ;  
– « Pe vin lonket gantañ, heb lared bu na ba  
Pe vo taget ganin ; n'eo ket an êsa tra. »  
Eur soñjig all avad a deuas en e benn.  
Didrouz, war e bouez, e tigoras e vuzetenn.  
Hag ar vombard er-mêz, an anchenn war he beg  
Hag Erwan ar soner o seni kreñv-dichek.  
Setu neuze penaoz an noz-se tro-war-dro  
E teskas al loened dañs ar jabadao.

Pascal TABUTEAU